

# CHANSON NEVEZ

VAR SUJET

## ANN DEKORATIONOU

**Demeus ann Dud Yaouank**

*Var ann ton a zizirfoc'h.*

Potret yaouank va c'hontre, preparet /ho moncho ;  
Deus koste ho jiletten staguit ho chadenno ;  
Lequet ober eur gol vontr en crec'h o chilleten,  
Didan o kasel eur hol gorn, en bordik ho chupen ;

Var ho rochet quasi bréin, leket eur c'holier guen,  
Ac istrabil deus ho koug lezit ho kravaten ;  
Lequet sira ho poutou arog mont deus ar guer,  
Ma na lez an didalvez ac'hanoëch d'en ober.

Eur boutou var glochedou p'otrammant var elastik,  
Eur laërou gant jarrettier, ze a zo magnifik ;  
Laket eur c'holier voulus var goure ho palto  
Ha dindan he basqueden, lequet o kodello.

Mes gant ho moñchouero, m'aint déjà remplisset ;  
Diou gol guz renkfet ober, evit beza complet ;  
Arabat a vot eaout diou regen voutonnou  
Na foeld colier abet ken deuz o chilennou ;

O prago 'n apon-bian, p'otrammant en toul-guis,  
Pe m'ar kerit en braguet, pa ne guir man ar c'his ;  
Eur yalc'h, eur horn à la mod, eur oested alumetes.  
Arc'hant, eur porte-money, anfin eur viceses ;

Grea da varo roc ma po, ran da vléo, mihiec,  
Da dog var goste da ben, cetu te pot c'hoezet ;  
Allomp troallac'h e ze, ne vang netra dit ken,  
Bross da zillat ha parti breman en pep tachen.

Mais setu-te ankoeiet sevel poejou da vont ;  
Da gontel man quet e kol, divoal mad **deus** da gont :  
Rac ma na pe kontel 'bet en ber pa c'hi da koan.  
Dirag da vestres 'po mez o tond da c'houl unan.

Brema kenta mad a ri, vo klask da gamarad,  
Evit monet assemblies d'eur pardon benakad ;  
Setu m'oc'h o c'haloupet beb sul d'ar pardonnio,  
Evit tachout anveout kalz a verc'het faro.

Da vestres a zo dija da c'hortos er pardon  
Ha pa ouelo ac'hanout a drido he c'halon,  
Pa gonsidero ennout, a vo joaius ha yè  
Eved ar bleûn er spern guern, en commandamant mè.

Pa zelli mad deonti, te ouelo 'n he c'here'hen  
Eur foular deus ar c'hera, pe eur pez kokarden,  
Eur c'holier dantelezet, ha calz a dréo al c'hoas :  
Eur chaden aour pe arc'hañt, medaleñ hag eur groas,

Pere zo penet dezi vit merk an amitie,  
Gand eur pod c'hoezet benag, guisket evedout-te ;  
Na ouie petra, allas ! prena d'be vestres koant,  
P'hini re goab anezhan, goude kol he arc'hant.

Sel ber-vancho da **vestres** karguet a c'hreun goular  
Hag he mouchouer **caby** dab beteg an' douar,  
E davanjer tuil-brodet, zo deus cree'h a deus traon,  
Daut a dant armoriet, henvel deus plun eur paon.

An talon deus he **boutes**, zo moan 'vel boenten ;  
Ru, gris, glas, pe violet, oelan ve he roben,  
E c'hoef vrai gand an avel, hag a zo diffetet,  
E diou **skouarn** disolo ac e bisac'h siret.

Laërou ru, eur paraplui woelan ganti iveauz,  
Hag anfin kals a dréo al deus ar c'hiziou nevez ;  
Nemes an terrupla tra, a meu-han remerquet,  
A c'hé ar-gocarden vrao en e c'herc'hen laket :

Guechal a eure en Frans eur bresel hir, meurbet,  
Entre ar Gatoliquet hag ar Brotestantet.  
Evit separi an eil arme demeus heben,  
Oa gred an invension demeus ar gokarden :

Mes goude l'*édit de Nantes*, pa oa tranquil ar Franç,  
Oa kavet ar gokarden eun dra a eloquans,  
Ma teu an dud-jentil nobl deus ar rouantelez,  
D'enori ar gokarden, en ho c'hompanuenez ;

Mez ne ket red bea nobl en amser m'omp enni,  
Rag an oll vere'het yaouank a deus peb a hini,  
Kouls var ar mez hag en ker, a zeler aneze,  
Rag eur gokardeu, michans, huella ar galite.

Arog dont de finissa, men laro n'eur guir ber,  
Nag hano kement kommun, zo 'formi ar c'hartier  
En pelec'h a ve douguet an ol akoutramant  
Hag an ol guiziou nevez en toez an dud yaouank :

Da gueuta Plestin, Ploufur, Tremël ha Plounerin,  
Plougras, Loguivy, Lohuec, Bolazec, Guerlisquin,  
Plougonver ar-Chapel-Nevez, kalz deus kanton Callek,  
Site Benac'h, Lannhuon, hag anfin Sant-Brieck.

Arsa eta, tud yaouank e c'han da achui ;  
Mes na deut quet, men ho ped, da guemer fachiri,  
Deus eun horolager yaouank, 'tistfei deus ar studi  
Hag a neus he c'hompozет non pas dre jalousi,

Mes vit n'om divertissa, rekrei he speret,  
'Rok mont da woel'd he vestres, da bardon Bolazec.  
En commun Guerlisquin ve goeled alliessan ;  
Tost da sec millions munut, zo boe m'an er bed man.

CH. ROLLAND.



*Propriété de l'Editeur.*